



# AR ROC'h GOUEON FORT LA LATTE

## ISTOR

Dont a ra anv ar Roc'h Goujon eus unan eus tiegezhioù koshañ Breizh (anvet Gwion, Goion, Gouéon, Goyon ha Gouyon). Hervez ar vojenn ez eo testeniekaet e vefe bet savet ar c'hastell kentañ gant Goueon, dindan renad Alan Barvek e 937.

Evit ar pezh a sell ouzh ar c'hastell a-vremañ e voe kroget d'e sevel a-raok donedigezh ar c'hanolioù e Breizh (1364), ha kendalc'het e savidigezh hervez berzh-mat Tiegezh Goueon, en eil hanterenn ar XIVvet kantved. Bez' e oa anezhañ e 1379, dre ma kasas Gwesclin ur rannad-soudarded d'ar Roc'h Goueon a zalc'has penn gant kadarnded. Diberc'hennet e voe Tiegezh Goueon eus e gastell-kreñv evit gounid Charles V, met daskoret e voe ar c'hastell d'e berc'henn da heul feur-emglev Gwennran (1381).

E-kerzh ar XVvet kantved ez eas war-raok dere kevredigezhel Tiegezh Goueon. War roll Stadoù Breizh e oant. Unan eus Tiegezh Goueon, bet kambrelan dug Breizh, a zimezas gant pennhêrezh baronelezh Torigni sur Vire. Diwar neuze e kuitas Tiegezh Goueon kavell Breizh hag e teuas da gemer perzh en istor Bro-C'hall. Dont a reas ur gouamour d'en em staliañ er c'hastell neuze, lojet en ul lojeiz kempennet evit an degouezh-se. Da vare stagidigezh Breizh ouzh Bro-C'hall (kaset da benn gant feur-emglev 1532) e voe lakaet seziz war ar c'hastell adarre (1490), ar wech-mañ gant ar Saozon na drec'hjont ket.

Da vare ar C'hevre e c'hoarvezas taol ar marv. Jakez II Goueon, aotrou a Vatignon, Marichal a Vro C'hall, Gouamour an Normandi hag ar Guyenne, a oa aet a-du gant Herri IV. Evit mont a-benn dezhañ e lakaas Sant Laorañs, un dileuriad eus Dug Merkeur, seziz war ar c'hastell hag e argadas anezhañ e 1597. Ar c'hastell a veze graet « La Latte » dioutañ e galleg dija d'ar mare-se, a voe dismantret, preizhet, freuzet, tangwallet. An tour-meur hepken a chomas e stad vat.

Gant ur c'hastell freuzet e voe dedennet an aotrou Garengreau, karget da sevel mogerioù kreñv war an aod evit difenn Sant Maloù. Treuzfurmet e voe ar c'hastell, evel ma oa dleet, gant asant Tiegezh Matignon etre 1690 ha 1715. A-drugarez dezhañ, dreist-holl, e vez anavezet ar c'hastell evel m'emañ bremañ.

E 1715 e teuas James III Stuart da repuiñ eno hag e kavas hirusus al lec'h... Evit gwir e oa degouezhet un nozvezh vil a viz Du. Er bloavezh-se e timezas Louis Hippolyte Grimaldi (prinsez Monaco) gant Kakez Frañsez Leonor Goueon, aotrou a Vatignon, dug ar Valentinois, gant ma vefe degemeret anv hag ardamezoù Grimaldi gantañ hep e re dezhañ.


E 1793 e voe savet a forn da ruziañ ar bolidi, ha toullbac'het tud, enep-dispac'herien, a oa diskred warno.

Aloubet e voe ar c'hastell gant tud yaouank eus Sant Maloù, da vare ar C'hant-Devezh (1815), met c'hwitet e voe o zaol ganto. An taol brezel diwezhañ a voe.

E-kerzh an XIXvet kantved e voe dilezet ar c'hastell tamm-ha-tamm, un evezhier hepken evit ober war e dro. Dirummataet e voe gant ministrerezh ar Brezel e 1890, ha gwerzhet gant an Domaniou e 1892. Freuzet e oa evit al lodenn vrasañ anezhañ pa voe rummataet Monumant Istorel e 1925. Abaoe 1931 eo bet kempennet gant tiegezh Joüon Des Longrais ha digoret d'ar weladennerien.

Deuet eo da vezañ ar c'hastell ar muiañ gweladennet e Breizh. Meur a film a zo bet troet ennañ, en o zouez « Ar Vikinged », gant Kirk Douglas ha Tony Curtis, koulz hag « Ar Chouanted » gant Phillippe de Broca.

# PLAEN A ROC'H GOYON



C'HASTELL ROC'H GOYON

GER-STUR MATIGNON  
«LEVENEZ A-VIKEN MATIGNON !»

GER-STUR GOYON  
«GLOAR PE ENOUR DA VIKEN GOYON»